

KIS-541 – Gl. anthropisation

(YBAN da GE – 05 & 09 05 97)

Sed ur frazenn gant FAYAT : “ [...] *L'anthropisation* des parcs (c'est-à-dire le degré d'intervention de l'homme dans l'écosystème) [...] ”

E galleg ez eus *humaniser*, *hominiser* hag *anthropiser*. Vallée a ro “ **humaniser** *dénelaat* ; (au sens moral) *dénekaat* ”. Evit Gl. *hominiser* a ra dave d'an argerzh o vont eus ar *primated* d'an den. Br. *denelaat* en degouezh, pe *denaat* ? Evit Gl. *anthropiser* 'm eus arnodet kalzik a draoù. Gwell mirout Br. *denien* a-gevatal da Gl. *anthropogène*. Al lostger Gl. *-iser* (*féminiser*, *climatiser*...) a ve tu da zeouezañ amañ gant *-aoz*, *pleusk-*, *-aez*, *-keuz*. Evit *dengeuziañ* a gavan re zurc'haet : "keuziet gant an den" ! *denbleusk* a ra dave d'an ijinerzh, d'ur pleusk re verket. Petra soñjal eus *denaeziñ* pe, gwell, *denaozañ*. Br. *hinaozañ* a dalvez "aozañ e sell d'an hin". Neuze *denaozañ* "aozañ e sell d'an den" ? Pe *denwezañ*, *dennodañ*, *denlouc'hañ*, *dengorañ*. Gant ur rakger e soñj din e ve ret mirout ar vellsteriegezh kreñv. Soñjet 'm eus ivez e *dender* (evel *tolzder*) pa'z eus anv a zewerzhañ un derez emell a-berzh an den. Betek gouzout evidon : Br. *denderiñ* !

(GE da YBAN – 12 05 97)

Gl. *anthropisation* "an derez eus emell an den en drevreizhiad". Diwar da zanvez diskoulmoù e spurmantan meur a hent da luniañ ar brezhoneg kevatal, gant o spletoù hag o riskloù :

I. – Hep deverañ diwar Br. *den*. Boas eur d'ober Br. *kalvezad*, Gl. *artéfact* eus al luniadoù diwar zorn mab den. Ne gav ket din koulskoude ez eo kevazas an hent-mañ, rak moarvat ned eo ket emellerezh an den direadus d'ar c'halvezerezh hepken — ouzhpenn se ez eus tro da arzaelañ an atalad “ kalvezañ = ober denel ”. Penaos envel an adeiladiñ renet gant loened 'zo ?

II. – O teverañ diwar Br. *den*.

II A. – Diwar-bouez ul lostger :

II A 1. – Diwar-bouez ul lostger penn-/adanvaat :

Br. *dender-*, *denderiñ*. Hogen *dender* a intenter "ar bezañ den", pezh na hañval ket bezañ an durc'hadur a heter.

Br. *denek*, *deneka*. E gwir, *deneka* ne hañval ket kouezhañ pell, p'en intenter "reiñ pe degemer perzhioù eus an den" (sl. KIS-093, La-05, p. 70). Hogen e Gl. *anthropisation* n'eo ket "perzhioù enlenat d'an den" a ambreder, met "kemmoù o tisoc'h diouzh emell an den". Gwell na zegas mesk enta.

Br. *denien* "dec'hanet gant an den, a zo e orin en den" zo deurus, met penaos deverañ dioutañ ? rak Gl. *anthropisation* a dalvez "kemmoù dec'hanet gant an den". An treug a ve sevel ur pennanv da envel "pezh a vez dec'hanet gant an den" : *denien* g. pe *denienad* g. ha, da heul, ur verb da arouezañ gwered an denien(ad)où war an drevreizhiad : Br. *denienadur*, *denien(ad)ekadur*... Anzav a ran ne gomz ket ouzhin nemeur ar goveliadennoù-mañ.

Ne gredan ket ober anv eus Br. *deniant*, *deniantiñ* dre ma soñjan e ranker na forzhañ al lostger *-ant* a zo o wiadiñ tamm ha tamm e zorc'hadur.

II B. – Diwar-bouez ul lostger verb :

Br. *denaozañ* diwar batrom *sonaozañ*, *kevanozañ*. Ar riskl gant an deveradoù diwar ar verboù trazeat eo e chomer en entremar war an od da glevout enno : e *sonaozañ*, *leraozañ* ez eo *son*, *ler* gouzañvour ; e *denaozañ* e ve *den* oberour. Ouzhpenn se e rankfed komz eus "denaozadeka" an drevreizhiad", pezh a ve gwall bonner.

Br. *denbleuskañ*, ouzhpenn an displetoù diagent, a yafe en tu all d'ar ster ergerc'het, rak an *A* ned eo ket dre ret an embreger greantel da dreuzfurmiñ ar metou.

Br. *dengeuziñ*, ya zo re zorc'haet, oc'h emplegañ ne c'hell an den nemet gloazañ an drevreizhiad !

Br. *denaeziñ*. Diegi 'm befe o tegas Br. *haeziñ* amañ, ken engwezhiet m'emañ endeo e lec'h all.

Br. *denwezañ* a ve da dostaat da *denaozañ*, gant an diforc'h e pouezer war an neuz evel e *luc'hwezañ*, *sonwezañ*, *lerc'hwezañ*... Anv a ve graet eus ar *gwez* lakaet war ar metou gant gwered/ober an den.

Br. *denwezhiañ*, nes ent sonel, ne ve ket salv a forc'hellegezh ivez.

II C. – Diwar-bouez ur rakger :

Br. *endenañ* luniet da dalvout kement hag "ober an den en" a ve intentet kenkoulz : "dont en den", "dont da vezañ den".

Br. *kendenañ*, *kantdenañ* "gwezhiañ kevret gant an den" n'int ket kaozeüs kenan — ouzhpenn ma c'houlglever ar verb *denañ*..., an denion o tenañ a-gevret o mamm Natur evel un torad doc'h.

Br. *annenañ* ?

Br. *arzenañ* savet diwar batrom *arvevañ*, "gwezhiañ an den war".
Br. *arzenadur* an drevreizhiad ?

Deurusoc'h e hañval bezañ ar rakger *gou-*. Ouzhpenn ar skalfad kemeradurioù a anavezomp, e'm eus bet tro da venegiñ c'hoazh Br. *gouzouret* "intret gant an dour". Br. *gouzenet* a intentfed "intret gant an den". Neoazh ez eus harzoù : ouzhpenn ar verb *denañ*, ar pa. *gouzen*. War an taol ne santan ket derez ar riskl a vesk. Mar be re harzus e ve tu d'ober gant *diouzenañ*, ar rakger kreñvaat *di-*, evel a ouzout, o vezañ diskalfet e zurchadurioù : *gorren* – *diorren*, *gougel* – *diogel*, *gougon* – *diougon*, h.a. Gwel hag arveradus e ve *gouzenadur* an drevreizhiad, *diouzenadur* an trevreizhiad...

(YBAN da GE – 17 05 97)

Evit gwir e'm boa armodet Br. *gouzenañ* ha *diouzenañ* ivez, met divastus en o c'havan evit an arbennoù a roez-te ivez : *gouzen* ha *denañ*. Me gav din e rank chom mellsteriek an termen a vo dibabet. Evel a lavarez ne gouezh ket pell *denekaat* : "Denekaat a ra ar chas o vevañ gant an dud" (KIS-093, La-05, p. 70). En degouezh-mañ ez eus anv a zaou voud etrezo darempredoù abaoe keid-all ma n'eo ket souezh e ve eskemmoù, perzhioù enlenat etrezo. Evit an natur avat n'emañ ket war an hevelep live hag an den. Setu perak eo ret kavout ur ger all. Ar galleg en deus eñ *humanisation* hag *anthropisation*. O loc'hañ diwar an evezhiadenn-se, sed disoc'h va hemolc'h.

En ul lankad kentañ e'm eus soñjet e termenoù evel *jedonikaat*, *barzhonikaat* VALL. p. 570 "POETISER *barzeka*at, *barzonika*at (et se –)". Diouzhtu eo deuet war va spered Br. *denonikaat*. Da heul hon pellgomzadenn eus an 29 05 97 ez eo sklaer ne glot ket. Rak, mar dalvez *jedonikaat* kement ha "reiñ ul luniadur jedoniel pe arloañ araezadoù jedoniel ouzh un ergorenn studi" e talvezfe ivez *denonikaat* : "dedalvezout an Denoniezh, arloañ araezadoù denoniel ouzh un ergorenn studi".

Mechal ha *denoniek* ez eus bet un dra bennak, pe hag eñ e vo... Meneget 'm eus dit *denoniañ* er pellgomz. Gwelomp.

Daoust ma n'on ket re chalet gant kudennoù gerdarzh n'eo ket fall pa glot hennezh gant ar ster ambredet. Pezh zo en argraf enta eo al lostger *-oni* :

GRVB. p. 355 : “ Terminaison *-ni*. Seul ex. v. br. GLETHNI « gloutonnerie » [...]. Note. *-ni* viendrait de **gn*/**mu* « acte » [...]. L'influence de la terminaison française *-nie* a pu contribuer à conserver cette terminaison en Bret. Ex. br. moy. mod. *cozni*, *kozni*, « vieillesse » [...], le bret. *dru(z)oni* « graisse », et *-oniez* de **oniaeth*, dans le br. moy. *goasoniez* « hommage », gall. *gwasanaeth* « service ».”

Iskis n'en defe ket FLEURIOT meneget BrE. ‘*kohoni*’, a ve *kozhoni* : niñv ar c'hozh enta.

Diwar Br. *barzh* e teu **barzhiñ* (testeniekaet e *barzherezh*), *barzhek*, *barzhekaat*, *barzhegezh* diouzh un tu. Ha *barzhoni(ezh)*, *barzhoniañ*, *barzhoniek*, *barzhoniegezh* ha *barzhoniek* diouzh un tu all. A-benn ar fin e ve *barzhoni(ezh)* “ niñv ” ar *barzh*, eleze e chem. Alese an durc'hadur ster kemeret gant *-oni* : *brasoni*, hag en nevezc'herioù *kenwerzhoni*, *yezthoni*, *jedoni*. Ned eo ket kevatal penn da benn *barzhek* ha *barzhoniek* enta. Gant *barzhek* ez ambreder perzhioù enlenat ar *barzh* (!). Mechal hag an hevelep re eo ha perzhioù enlenat ar *varzhoni*... Un arvez a gemplezhded a zamverzhan el lostger *-oniek* e-keñver al lostger eeun *-ek*. En dro-mañ ned eo ket ar *varzhoniezh* ur skiant ha *barzhoniek* a glot mat gant "dedalvezout ar *varzhoniezh*, arloañ araezadoù *barzhoniel* ouzh un ergorenn". Kudenn ebet enta.

Br. *jedoni* a ve "niñv ar jed, ar jediñ hag alese arz ar jediñ ivez". Evit *jedoniañ* a dalvez "ober jedoniezh, sevel ergorenoù jedoniel" a vo studiet ha dedalvezet gant ar *jedoniezh*. Petra a ve *jedoniek* neuze ? Mar lavar an da skouer “ *jedoniek* ar *yezh* ” e vo intentet "klask reiñ d'ar *yezh* un neuz *jedoniek* = niñvañ war ar *yezh* gant araez ar *Jedoniezh*".

Hag an termenoù skiantoù en *-oniezh* ? Kemeromp Br. *douaroniezh*. An **douaroni* a ve "niñv an douar, eleze ar menezioù, an torosennadur, an hin, h.a." ha da heul an *douaroniezh* a ve studi disoc'h an niñv-se. Heñvel dra gant *doueoni*, *doueoniezh*. An hini kentañ a ve "niñv Doue, chem Doue" hag an eil studi an niñv-se, ar chem-se. Ha krediñ a rafen da skouer lavarout ez eo “ *doueoniek* ar *vaouez-se* ”, o

welout merk Doue war he c'hened ? Un arster a welan neuze etre “ *doueek* qui possède du « dieu », du « divin » ” VALL. xviii, “ *douegezh* [...] la « divinité », « le divin » dans les personnes ”, id., ibid. ha *doueoniek* "warnañ merk niñv un doue pe Doue", hep ma ve doueek evit kelo bep taol. Ha **doueoniañ* a ra Doue c'hoazh ? Sevel ar ger a savel ur gudenn a lezan gant ar re zoueoniet, labouret ha *niñvet* (!) gantañ...

Quid eus Br. *yezhoniezh* ? Hep mont betek lavarout evel tud 'zo ez eo ar yezh ur c'halloudezh enskrivet en hon glad hilel a zenion (al luniadoù hebiñ da nebeutañ) – pezh a chom c'hoazh dindan imbourc'h – e c'haller sellout ouzh ar *yezhoñi* evel niñv ar c'halloudezh yezhañ warnomp hag ar *yezhoniezh* evel studi disoc'h an niñv-se, eleze ar yezh.

Hag a-benn ar fin e teuan da Gl. *anthropiser* diwar Gl. *anthropique* "graet gant an den, diwar bezoud pe niñv an den". Ar Br. *denoni* a ve neuze "niñv an den, merk an den, louc'h an den war udb.", kevatal d'ar Gl. *le génie humain*. Da heul, *denoniañ* a ve a-berzh an den embreger e "chem bezañ den", ober "e vicher den". An *denoniezh* a ve studi an *denoni*-se erzerc'het warnañ e-unan da gentañ penn (korfadurezh...) hag ivez war e oberoù : kevredigezh, sevenadur, h.a. A se un “ drevreizhiad *denoniek* pe *denoniet* (hervez an arster roet) ” a ve un drevreizhiad warni merk niñv an den.

Ha ne glot ket seurt durc'hadur ster gant *-oni* ouzh pezh a lavarez KIS-439, La-10, p. 146 : “ *Mezoni* un urzhiataer a ve e varregezh da zenzen mezoniezh evel, hep leterc'had bras, ma'z eo *jedoni* un den e varregezh da zenzen jedoniezh.” Betek disoc'hañ gant *mezoni* : an trevnad elektronek e-unan ha zoken ar parzhioù anezhañ. Moarvat e c'haller empentiñ an hevelep tra gant Br. *kalvezoni* : “ kalvezoni ar skramm ” (GSTL. ¶ 4125). Evit Gl. *techniciser* e welan GEAK. p. 231 : “ *kalvezekaat* ”, diwar *kalvezek* ; *kalvezekaat* a reer ar gounezerezh da skouer, ar gevredigezh o vezañ *kalvezoniet* hag a-benn ar fin o kaout un neuz *kalvezoniek*. Anat ar forc'hadur ster amañ.

Heñvel dra diwar *kenwerzhoni*. Gant **kenwerzhoniek* e welan un arster : kempleshoc'h eo, o tiskouez niñv ar c'henwerzh war un amgant bennak, lakaomp da skouer an darempredoù etredenel, tra ma talvez *kenwerzhekaat* reiñ un neuz, perzhioù kenwerzhel d'ur c'henderc'had. "Evit kenwerzhelañ ur c'henderc'had e rank bezañ kenwerzhekaet da gentañ."

Ur gudennig 'm eus diskoachet gant Gl. *informatiser* : GSTL. a ro *stlennekaat* evel GEAK. a-du-rall. Nemet hemañ diwezhañ a lavar ivez : *stlennekaat* "donner un caractère informatif". Da-64, p. 110 : *stlennekaat* "mont pe lakaat da vont stlenneg" ha *stlenneg* "a zo stlenn gantañ, o tougen stlenn". Ur gudennig nad eo ket kudennus a-benn ar fin, rak ul lamm ster ez eus etre *stlenneg* ha *stlennoniezh*. Da heul, **stlennoniek*, *stlennoniekaat* a rafe dave d'ar *Stlennoniezh*, eleze skiant, damkaniezh ar stlenn. Arveret eo bet *stlennoniekaat* ganin endeo (*Emsav* 125, p. 23) gant ster ar Gl. *informatiser* en ur mare ma ne oa ket anv c'hoazh a *Stlenneg* ! Evel just e kavan dereat kenan Br. *stlennekaat* evit Gl. *informatiser*, diwar ledanviñ.

Tennañ a ran va mad eus an evezhiadenn-mañ evit degas ur c'hraf all. Br. *stlennegour* zo evit ar Gl. *informaticien* hag ar Br. *elektronegour* evit ar Gl. *électronicien*. Ha neuze perak Br. *stlenneg* ha Br. *elektronik* ? Kement-mañ zo bet lakaet a-wel gant Gwenael MAZE a zo dilaouenik gant *elektronik* ! Ar Kb. a lavar ivez *electroneg*. Ne vefen ket chalet da zegemer ur Br. *elektroneg*, pa na ve evit ar c'hempoell.

Evit ar Br. *denien* a ve kevatal d'ar Gl. *anthropogène*, eleze a orin denel. Ha chom a rafe c'hoazh Gl. *hominisation* : hollad an argerzhioù dedroadel, korfadurel, bevedel, breidel naous d'an tremen eus an uhelloened d'an den. Roet ez eus bet ar c'hevatal Br. : *denelaat* (KIS-093, id.). E galleg un termen nes zo *anthropogénie*. Ar c'hembraeg a ra gant *dynweddiant* a-gevatal da Gl. *anthropomorphisme*. Hep menegiñ Gl. *hominidé*, *hominien*, *hominoïde* ! Evit ur wech all e vo, nemet e'z pefe mennozioù...

(GE da YBAN – 01 06 97)

Emañ ar gwir ganit : ur savlec'h nevez zo entalet gant Gl. *anthropiser* disheñvel diouzh ar savlec'hioù a gaver gant *humaniser*. Teir urzh deselloù zo da zeZRannañ : a) bezañs ha realezh an den evel spesad etre spesadoù all, studiet e-barzh un drevreizhiad ; b) davedelezh an den, an natur, an den en natur, an den evel natur, an natur en den, an den enep d'an natur..., andavedelezh an den, an natur... c) obererezh an den e kement ma tezev an natur hag eñ e-barzh evel dezevour (eleze realiad, gouziad, devredour). An desell a) zo hini ar Skiant, an desell b) hini an Divezouriezh ("divez" ha "daved" zo boutin etrezo keal un durc'hadur treadegel ma n'eo ket trabedel), an desell c) hini ar Politikerezh (e ster klok Platon evel just). E galleg e oa

diaes de verañ diwar *human-* evit dec'heriañ kealioù eus skalfad an deselloù-se en askont eus ar c'hennotadurioù puilh o sammañ an hanc'her abaoe dek kantved. Setu perak, ken abred ha 1900 e kaver Gl. *anthropique* e-barzh geriennoù evel *érosion anthropique* "krignerezh e dianlen realezh an den". Ne anavezan nemet un deverad diwar Gl. *humain-* a ve dieub diouzh ar c'hennotadurioù klasel : er c'herienn vezegel Gl. *humanisation du lait*, eleze "pleuskañ al laezh loenel evit e nesaat ent kimiek d'al laezh denel". Ar brezhoneg en deus heuliet ar galleg (ha yezhoù all Kornog) a-fet kennotadurioù, zoken mar en deus graet gant an amprestoù *humen*, *humanite(z)* e-kichen an deveradoù diwar *den*. Setu perak, evel a verkez ivez, ez eus gant *denekaat* (*an natur*) ur ster nad eo ket kevatal da Gl. *anthropisation*.

A-du on gant da *denoniañ* dre veur a abeg. Da gentañ, peogwir ez eo ret dibab un hanc'her anarver c'hoazh da zec'heriañ ur skalfad kealioù nevez. D'an eil, peogwir e chom heverzh e'z kinnigadenn ar stirann *den-*, na oa ket e'm *gouzenañ*, *diouzenañ* (ouzhpenn ar forc'hellek ma oant). D'an trede, pa'z eus un derez kantabeg gant dibab al lostger *-oni*, n'eo ket kement-se dre ma rankfed klevout gerdarzh *niñv* ennañ (gouez da FLEURIOT, hogen GPC : "< Brth. *-on"#sa# " ; seurt rekour d'an orinoù a c'hoarias gantañ PLATON, HEIDEGGER, LACAN... — perak ket te ? — a vez peurliesañ un arguzenn goude taol, dareuladek kent eget yezhoniel), hogen dre berzh an durc'hadur ster dispaket er yezh arnevez gant *jedoni*, *kalvezoni*, *kenwerzhoni*, *mezoni*, h.a. Arabat e ve koulskoude dezren steriegezh *denoni* diwar ster ar gerioù-mañ diwezhañ, na diwelout ez ebarzhez *denoni-* pa'z eus ezhomm anezhañ da sammañ steriegezh *anthropis-* evel ma tiglour en hon amzer. Ac'hoel, kentañ tennad eus an emell yezhour eo enporzhiañ steriegezh *anthropis-* hag he debarzh da *denoni-* ; tennadoù all a c'hallo dont goude dre an devezout renet e brezhoneg hag, er gwellañ degouezh, dre ma vo ar brezhoneg araezusoc'h d'an devezout eget ar yezhoù all. Pezh a fell din lavarout eo n'hon eus ket da c'houlenn digant ar yezh devezout evidomp — ar gerioù zo ar pezh a lavarar eus an arc'hant, " mevelion vat, mistri fall ".

A-du-rall, arabat reizhiadekaat, poellonikaat betek re steriegezh *-oni*, *-oniezh* na kuzhat an torroù a zo e-barzh. Hep komz eus o istor e kembraeg, ez eus un torr kentañ graet gant VALLEE p'en deus debarzhet dezho ar ster "skiant eus", (en ur lakaat war *-ouriezh* ar ster : "dedalvezadur skiant eus", en ur c'houzañv ivez ur bern nemedennoù, heuliet ganimp er c'heñver-se evel a'm eus eñ meneget e KIS-490, La-10, pp. 342-343). A-du-rall e chom istor an debarzh-se da sklaeriañ : da orin dezhañ eo marteze an hapaks *stéronidiaez* ensilet evel " mot ancien " gant HV. e GON.FB. ha GON.II. Ur frailh all etre *-oni* hag *-oniezh* zo deraouet ivez e grez VALLEE gant " la tendance de la langue à l'employer [-oni] au sens moral " hervez M. LE ROUX —

“ tued ar yezh ” en deus kendalc'het d'ober e reuz betek hon *kenwerzhoni* ha *mezoni* ! Hag evit komz eus *stlennoniezh* ha *stlenneg* a venegez, ez eus ivez ur frailh etrezo dec'honet gant dedroadur ar bed — na glaskomp ket teurel pontoù koustet a gousto evit kuzhat skarroù na roont ket gwanded d'ar yezh, met yec'hed d'an dezevout ha dre se d'ar yezh.

Ar frailh etre Br. *elektronik* ha *stlenneg* n'eo ket un devoud nemedennek, test eo hepken eus istoregezh ar yezh, enni tri lankad evit a sell envel an diskiblezhioù : 1° an amprestañ “ etrevroadel ”, sk. *fizik* (< 1464), *elektronik* (1963), *kimiezh* (# 1963) ; 2° al lostgeriañ dre *-oniezh*, *-ouriezh*, *-adurezh* (< 1919), 3° al lostgeriañ dre *-eg* (1992).